

92

AR VESAEREZ



Di - sul vin - tin, 'vel ma sa - ven, ho! Di-sul vin-



tin, 'vel ma sa - ven, eur vouez dous a gle - ven, é lon



la, eur vouez dous a gle - ven, ho!

2

Eur vouez a gleven o kana,
E lez ar c'hoad tosta.

3

Eur vouez bravoc'h ne c'heller ket,
Klevet e bro ebet.

4

Vit kana gwelloc'h ne 'z eus ket,
Met an costig er bed.

5

Ha dre al lann pa dremenen,
Bleuniou a gutuilhen.

6

Ha war bleg va brec'h o c'hasen,
D'an hini a gleven.

7

Ouz ar c'hoad dre ma tostaen,
He c'hlevet gwell a raen.

8

Met, allas, he c'hlevet a raen,
Hep kompren he sonenn.

9

Eur zonnenn deut eus a Vro-C'hall,
Gant eun trouc'her-segal.

10

Kerkent va bleuniou rus ha glas,
Eus va dourn a gouzas,

11

Rak n'am oa ket o c'hutuilhet,
Vit eur verc'h ken desket.

J. LE BAYON